

Brezel  
1870

Prigent (an Autrou) person  
Confirmation

# KANAOUEN

DA VEAN KANET GANT BREIZIZ ENN EUR VOND D'AR BREZEL

(Miz Dù 1870.)

War don Gwerz Paotred Plouillau

(DA VEAN KANET 'N'EUR VALE DUAN)

## DISKAN.

*Santez Anna, patronnez Breiz, enn-hoc'h e ma hon fians!*  
*Dindan ho kwarez ni a red da zikour difenn ar Frans,*  
*Ouz Bismark, ha Fritz, ha Gwillerm, ar fallan tud euz ar bed!*  
*Bikenn servijerien Mari ne vezoint Prussianed!*

1. Pa'z eo 'ta red d'imp, Bretoned, pa'z eo red d'imp dilezol,  
Evid eunn nebeud devejo, hon brò karet Breiz-Izel,  
Kemeromp kalon, me ho ped; abenn eunn nebeud amzer,  
Ar Prussianed vo devet : ni a distroio d'ar ger.

*Santez Anna, etc.*

*crisis* 2. Breiz-Izeliz, bete vrema, hon breudeur zo bet sellet  
Vel ann dud muia kalonek a zo bet biskoaz gwelet :  
Goulennet-han digant Trochu, goulennet-han e Paris;  
Ann holl, gant hast, a lavaro : Hon gwella difenn, Breiziz!  
*Santez Anna, etc.*

3. Abenn-nemeur roue ar Pruss a lavaro, 'vel gwechall  
Ar Romaned, enn ho brezel ha da Vreiz ha da Vro-C'hall :  
« Pegen spontuz e'r Vretoned, pa griond, ouz 'n'em difenn :  
« *Sko enn tâ klei, sko enn tâ deou, hast terri d'ehan he benn!* »  
*Santez Anna, etc.*

4. Er fuzulio, er c'hanolio hag er mendrallerezed  
Ha Bismark, ha Fritz, ha Gwillerm ho holl fians deuz leket,  
'Vel Goliath, peùlden, siuz enn he wisk houarn hepken,  
A glaske, enn arme Saül, 'vid en em ganna, eunn den.  
*Santez Anna, etc.*

5. Mès David, krenn-baotr, 'n'he Zoue he fians a lekeaz,  
Hag ar peùlden, gand eur men-dalm, war ann douar a ledaz;  
Evelse da Willerm demp-ni, siuz enn Dreinded Santel,  
E gwarez Mari hag Anna hag ann Arc'hel zant Mikel.  
*Santez Anna, etc.*

6. Bezomp dinec'h, Breiz-Izeliz, rak Doue en deuz karget  
Ha zent ha zentezed hon brò, roet d'imp 'vit patroned,  
D'hon diwall bepred e pep risk 'vid hon c'horf pe hon ine;  
Holl 'vid-omp er gann e stourmoint : ni ne gollfomp ket neuze!  
*Santez Anna, etc.*

7. Nann! nann! nann! nann! Prussianed, keit ha ma vo eur Breizad  
Beò, iac'h, dinam hag o c'hallout 'n'em dere'bel war he zaou droad,  
Birvikenn ne vefet gwelet oc'h ober dismant 'n'hon brò,  
Ar Breizad kentoc'h a lezfe rei d'ehan kant mil maro!

*Santez Anna, etc.*

8. Bete vrema, sioaz! hoc'h euz, 'n'eul lóden vraz euz Brò-C'hall,  
Gret kement drouk, fallagriez, a hell ann den da sonjal :  
Torret hoc'h euz, tud disleal, holl lezenno ar brezel,  
Drè ze hoc'h euz c'houezed ann tân e kalon tud Breiz-Izel.

*Santez Anna, etc.*

9. Evid-hoc'h awalc'h n'en eo ket tana tiez, ilizo,  
Dispenn kement so d'ar re veò, kâs gan-ec'h ho holl vado ;  
Tud varo gan-ec'h divesiet, deud hoc'h bet d'ho diwiska,  
Gan-ec'h eo et ar pez a oa bet leket d'ho liena.

*Santez Anna, etc.*

10. Gan-ec'h, e Breiz, ar veleien ne vezoint bikenn krouget,  
Na leanced, na menec'h euz ho ziez harluet ;  
Hon ilizo ne devfet ket, ni vefe devet kentoc'h :  
Kement so gwestled da Zoue, mann-bed d'imp talvoudusoc'h!

*Santez Anna, etc.*

11. Gwal-gas ann holl, koz ha iaouank, ar re zoken didamall ;  
Dibenna he gorf da unan, rei eunn tenn fuzul d'eunn all ;  
Gwalla groage, merc'hed iaouank, ha goude-ze ho laza :  
Se d'ar Prussianed so mäd! Torfedo ann euzusa !!!

*Santez Anna, etc.*

12. Mar am c'hredfac'h, divrôidi, prim d'ar ger e tistrofec'h ;  
Ar rôd a dro, bed eo a dû, mès pell ken a dû gan-ec'h.  
Abenn-nemeür ann holl dud veò a glevfer o lavaret :  
Ar Prussianed, gant Breiziz, e Brò-C'hall zo douaret!

*Santez Anna, etc.*

13. Ann de merket, chetu ann heur, kenvroiz a Vreiz-Izel!  
Pebez enor eo evid-omp bean galvet d'ar brezel,  
D'eur brezel zantel 'vel he-ma, 'vid difenn fe, tud ha brò!  
Holl e refomp 'vel zo dleet ; kentoc'h ni vezo distrò!

*Santez Anna, etc.*

14. Ar chapeled enn hon godel, ouz hon goug eur vedalen,  
Ar skapuler war hon diskoa, sîn ar Groaz enn hon c'herc'hen,  
Ar fuzul 'n'hon dorn : ha neuze, dirak piou e kreusomp-ni ?  
Kammed dirak Prussianed : n'anaveont ket Mari!

*Santez Anna, etc.*

DIVEZ.

Ann Otro PRIGENT, person Lanvilin.